

**Proux** : (Pullaouen 1811 – Montroulez 1873).

## **Mouez ar Hleier**

Bim, baon, me 'zo strobinner,  
Mer 'oar petra 'gan ar hleier.  
Sdelaouit oll o mouez santel,  
Ha sentit mad ouz o hentel.

Bim, baon, baon ! kloh an overn-bred,  
Lared a ra : « Hastet, hastet ! »  
Kalz ne zegouezont en iliz,  
Nemed en hanter an ofis.

Darn ne reont nemed rohal,  
Ha lod all, respet deoh, strakal,  
Tompillad gand o diou froenn,  
Pe riboulad o horzaillenn.

Ar baotred lemm, dindan o zao,  
A lugern ouz ar merhed brao ;  
Gand eur zell flemmuz, ar merhed,  
A lavar dezo : « Kendalhet ! »

Yann Bitoch a glask 'n e spered  
Penaos yenna e vignoned,  
Lakaad en e yalh eur bern kresk,  
Dre ar burzud euz ar pemp pesk.

Ar person koz 'zo baroduz,  
E brezegenn 'zo moreduz,  
Heb mar ar zoubenn 'vo yenet,  
Hag ar patatez kaledet.

Ar haner koz, Luk Totorn,  
A vlej 'vel eur hole-taro...  
Emberr e walho e gorzenn,  
Fant a lardo c'hwek e grohenn.

Bim, baon, kloh eur vadiziant,  
Ar bugelig, va feiz, 'zo koant.  
Hag ouz e dad heñvel-tre,  
Fri e baeron 'n-eus koulskoude...

Gand an holen kriz, va êlig,  
E vo ruziet da vuzellig...  
Er vuhez, enkreuz ha daelo'  
E kavi c'hoaz muioh c'hwero...

Bim, baon, dimezi daou baour-kêz,  
... Poaniou, truillou, ha dienez...

Sort da frita 'med paourentez,  
E-leiz pillig ar garantez !

Ba ! chaoket e vo patatez,  
Lakaet hanter dour 'barz al lêz :  
Doue a vev al loened mud,  
Truez en-devo ouz an dud !

Bim, baon, eun eured pinvidig,  
Brall d'ar hleier, c'hwez d'ar muzik,  
Diou yalh ponner 'zo 'n em baret :  
Ki ha kaz a zo baz-yeodet.

Bim, baon, brimbalom a-nerz breh,  
Marvet eo pao-krog ar hrog seh...  
Ognon, kignen, a-zruilladou,  
Ken na strinko eur mor daelou.

Bim, baon, petra ne leront ket,  
En kement yez 'zo 'tre ar bed ?  
Koulz eo din eta troha berr,  
Sard on, 'vel eun teuzier kleier !

Tad eun tad braz bugale,  
A zo galvet dirag Doue,  
An oll a ouel gand gwir glahar,  
Ar hi a yud war-lerh ar harr.